

RECIT TRIST

Eur plac'h yaouank pinvidik deus Poitie,
so bet dalc'het e kaptivite gant he zud,
en un c'havarn tevel pad pemp bloas varn'
ugent. Breman e man en hospital.

Ton ar roue Gralon.

Klevit diskleria, Bretonet,
Eur vuez a so trist meurbet,
Buez eur plac'h a galite
So e chomm e kaer a Potie.

Homan d'oa bet ar sentiment
D'eureuji d'eun noter yaouank,
He mam digar d'oa empechet
Vije d'an den se eureujet.

He mam, leun a ingratiri,
A zalc'he d'he fersekuti,
Gweloc'h oa d'hei beza maro,
Vit beva gant eur mamo.

Goude he seis vloas varn'ugent,
Vit rei skler d'an oll da entent,
Betek he daou ag anter-kant,
Deus souffret ar brassa tourmant.

Tourmanchou an oll verzerien,
Ag hini an torfetourien ;
Neus ket kement a grueldet,
Vel ma neus Blanch Monier souffret.

Ia ! Blanch Monier a so bet
Pad pemp bloas varn'ugent kuzet,
Gant he zud, en eur c'havarn klos,
Laec'h na wele na deiz na noz.

Pad ma oa n'he c'haptivite,
He mam digalon, didrue,
Roet ket dezhi da zebri,
Met demoranchou tud an ty.

O krial, pa vije klevet,
Dre druez an domestiket
A daole dezhi oranjes,
Vit soulaji ar verzeres.

Allas vit golo he c'hroc'hen,
D'oa ket a zillad, kristeinien,
Ne d'oa na rochet nag ivis,
D'eur plac'h pinvidic zo iskis.

D'oa ken neubeut eur gwele,
Var eur baillasen e kouske,
Var eur baillassen tremen breïn,
Ar prevet dibri he c'hroc'hen.

Ho Doue, rusta pinijen
Deus bet Blanch Monier da souten,
Pemp bloas varn'ugent er bed man,
Goude kavet kals peadra.

He mam devoa arc'hant ag aour,
Talvoudeges eis kant mil liour,
He merc'h a zalc'he merzerez,
Hag hi zalc'he renk ar Palez.

Eur soudard a zaremprede,
Eur vatez a oa en ty se,
Gant p'hini n'oa ar soudard klevet,
Oa Blanch Monier persekutet.

Heman neuze n'oa disklêriet
D'ar justis ar pezh n'oa klevet,
Dre ze ar justis n'em rentas
Bars'en berr amzer var ar plas.

Pa oa ar justis nem gavet,
Leac'h oa ar verzerez kuzet,
Devoa bet mil boan o c'hantren
Gant ar c'hwez fall sevel d'ho fen.

Pa d'oa gwelet ar plac'h kes man,
Ho goad oa bet deut da frima,
Oa ket evel eur fumelen
Ganet dre an natur humen.

He bleo neuze so bet troc'het,
Karget endurniez a prevet,
A pwezet e oant bet goude,
A tremen eiz liour oa en'he.

Ag e fri a oa hir meurbet,
Ag he daou lagad enfonset,
He c'horf karget a loustoni,
Truez oa gwelet anezhi.

Dan hospital eo bet kasset
Ag eno vez breman soignet,
Vit beza bet pell merzerez,
Marteze d'eo c'hoas hir vuez.

Breur Blanch Monier kouls ag he mam
Diou galon gris a tud infam,
D'ar prison so bet konduet,
Da c'hortos vo justis rentet.

He vam so marvet er prison,
N'ouzont ket e pe seurt feson,
Lod gred eo marvet gant klevet,
Lod all gred n'em empoesonet.

He breur so bepret er prison,
Kever he c'hoar eo bet poeltron,
He vuez marteze d'eo fin,
Dre nerz kontel ar gillotin.

Reketomp breman Bretonet,
D'ar verzerez man ar yec'het,
Ma c'hello ivez er bed man
Jouissa deus he feadra.

Propriété de l'auteur.

LOUIS LE BRUN.

DISCOUR

Entre daou den yaouank

WAR EUN TON CHARMANT

Tud yaouank a Vreiz-Izel, tostaït d'am zelaou
Ha c'houi a glevo kana ebars en ber komzou,
Eun discour hag a so bet entre daou den yaouank,
Hag a barlant e peb eil, hervez ho zantimant.

AR GOAS

Salut d'eoc'h, plac'h yaouank, objet va c'harante,
Me a zo deud d'ho gwelet, an devez a hirie,
Da c'houi a c'houi ho pebe breman ar vadeles
Da zont da gonsoli nep zo en tristidiges.

Va speret deu da nijal koulz en noz 'vel en de,
Beteg ennoc'h, plac'h yaouank, gant eur gwir garante,
Pa peuc'h va c'halon charmet hont deut da n'em avans,
Evit klask soulajamant demeus va holl soufrans.

AR PLAC'H

Mar klaskit soulajamant demeus ho soufransou,
Ne glefec'h ket, den yaouank, dont da avans ho pachou
Ha beteg eur fumelen a zo meurbet dister,
Na ne deus ket ar pouvoar d'ho lemel euz ar vizer.

AR GOAS

O ! salokroas, plac'h yaouank, neus ket gant mam ganet
Eur fumelen evel d'eoc'h, dezirabl d'am speret,
C'houi hep ken a c'hel rei dime soulajamant
Demeus an holl soufransou pere dalc'h languissant.

An hini partaj he vonheur, deu ive d'en kreski,
Ha dre se 'ta plac'h yaouank, mar be d'ho fantasi,
C'houi zigoro ho kalon, breman en ber amzer,
Evit ma c'hallo receo hini ho servijer.

AR PLAC'H

Va c'halon me, den yaouank, a zo tener meurbet,
Hag a zo c'hoas re yaouank da veza digoret,
A da veza d'in karget demeus a dourmanchou,
Se em rentfe langissant beteg fin va deiou.

AR GOAS

O ! eskusit, plac'h yaouank, ne c'hit ket da gredi
Penaos vefen eun treitour karget ingratiri,
Hag e teufec'h d'am receo evit hor servijer,
Birkiken en ho kever, ne vezin godizer.

Dont a rid, plac'h yaouank, d'am skei gant eur c'hleze,
Pehini dreuz va halon beteg an daou goste,
Goude m'ar deuet d'am skei gant eun taol ken mortel,
Me chomo, en peb amzer, deoc'h hu bepred fidel.

AR PLAC'H

Ho propojou, den yaouank, a zo touchant meurbet,
Kapabl int da iac'haad euh askorn bet tored,
Mes ma teufen-me brema da gredi anezhe,
Vefen rentet en glac'har beteg fin va bue.

Gwelet meus bet alies merket war ar paper,
Ar c'hoarset a zo treitour ebars en peb kartier,
Ar merc'hed deu gant fiars da gredi o c'homzou
Ve goude presipited en eur mor a zaëlou.

AR GOAS

O ! permetet, plac'h yaouank, breman an holl c'hoarset
Ne n'int ket holl treitourien evel ma leveret.
Ha ne c'hoarvez ket gant he, vel gant ar judevien,
Pere lakeas d'ar maro hor Salver souveren.

Me zo henvel, plac'h yaouank, eus ar soudart vaillant
Pehini vit drapo e vro deus karante ardant,
Hag evel-se, me ive, pad ma vin en buez
Em ko evidoc'h bepred sur eur gwir garantez.

AR PLAC'H

Me a gred, den yaouank, dre ma oc'h studiet,
Peuc'h laket en ho speret dont da goapaad merc'het.
E dont d'ober kement se, na gresk ket ho madou,
Mes koll a ret ho poan ha uza rit ho poutou.

AR GOAS

Ms ne n'hon ket deut aman vit goapaad merc'hed,
Rag beza e zo dija kals amzer dremenet
Abaoue ma peuc'h, plac'h yaouank, va c'halon din charmet
Dre o c'holl talanchou ker, ho furnes, ho kenet.

Ha ne roan ket a fors da uza va boutou,
Ken neubeut vit kavet poan ha kals a soufransou,
Kement se holl a basefe, vel ma ra eun unvre,
M'ar teufec'h d'am receo bars en ho karante.

AR PLAC'H

Ma teufen me d'ho receo ebars em c'harante,
Va c'halon ve en hirvout kouls en noz vel en de,
Rag ar proverb, den yaouank, deu da laret deomp ni
Karout hep beza karet a zo kalet ha kri.

Eun neubendik amzer zo, oa lavaret did-me
Poa choaset eur fumelen evit ho karante,
Hag a zo plac'h a zoare, ganet en ho kanton,
Hag houn-nez e deus charmet, den yaouank, ho kalon.

AR GOAS

C'hui plac'h yaouank, peuc'h kredet ar gwel deod diavis
P'hini so en peb amzer boureo d'ar yaouankis,
Goud a oar laret a gaou, evel pa vez gwirion
Ag e laka en glac'har sioas meur a galon.

An teod malisius so mevel gant Lucifer
Ag a so poent bras dezhan dont da chanj' a vicher
A lezer an dud yaouank bars en ho liberte
A zalc'h dindan he c'hrifou bars en kaptivite

Demeus an teod infernal, me a c'hel lavaret,
Neus ebars en he brison : breman va dastumet,
A neuze va chadennet beteg griou va c'halon
A vo rentet langissant, ep konsolation.

Ma ne deut ket d'am zenna deus o kaptivite
Me vo bars tri deiz aman diskennet bars em be,
Rag me oa deut ho beteg gant gwir intansiou
Ne mijemp gret hou daou breman met eur galon.

AR PLAC'H

Ho prepojou, den yaouank, a bwez var va speret,
Ma c'houfen vez ket gwirion ar pez a meus klevet
Me a deufe breman da soulaji ho kalon
Ep donet da respeti a gwel deod er c'hanton.

AR GOAS

Fumelen garantezus, deus se bet assuref.
Penaos neo ket gwirion ar pez a peuc'h klevet,
Me ne non ket deut aman da gonta flabenou,
Bezit ar gwir vadelez, da zilaou va c'homzou.

Tri bloas a so tremenet aboue zul ar Rozera
Aboue ma bet an henor d'o gwelet da genta,
Ag he m'oa o remerket, o dont deus an ilis
A c'hui kaeroc'h vit ar roz, ag evit fleurdilis,

Ag aboue an devez se, a gonsolation
Peuc'h konsevet plac'h yaouank, un tenzor em c'halon
Ma ne me ket an evrustet da zont d'ho posedi
E finiso va buez sioas gant an annui.

AR FLAC'H

Deus o klevet den yaouank, va c'halon so touchet
Ken a c'hon bars em daerou lija kazi beuzet,
Mevel bras Beelzebuth, sioaz e sa kredet,
Dre-se 'ta m'oa ar gredeu oac'h godiser merc'het.

An termen a lakan d'ec'hu va servijer :
C'houi retorno adarre ben ter zun pe peder,
Ben neuze me mo goulennet ive va liberte,
Digant va c'herent ker beteg fin va bue.

Va zad ha va mam dener, gant ho permission,
E meus c'hoant da eureuji gant desir va c'halon,
Haga zo den a zoare, dez han aour hag archant,
Ha kaera den a daol troad dindan ar firmamant.

Ma oc'h c'houi choaset va merc'h gant krouer an Envou
Da venet ive breman en rener prijeou,
Nimp, gant eur galon laouen, ro deoc'h ho liberte,
Evit beza eureujet d'ho dous, d'ho karante.

Cetu an daou zen-ma zo breman eureujet,
Ee despet d'ar gwell deodou, zo e ren bar er bed,
Chans a reketan dezhe, aman war an douar,
Eur peoc'h padus goude d'ho ini bars er gloar.

Propriété de l'auteur.

Louis LE BRUN.